


MERZERINTI

SANT LORANS.

War don : *Ele ann env, deut d'ann douar,*
pe donio 9, 25 ha 27 Dom Henry.



nn otro sant Lorans merzer
zo mad he gemer da skouer
a rei da Zoue eveltan
nn hon c'halon ar plas kentan.

ia ! Krister er c'hredet,
» Klasket zo er bet
» Lorans mad hag evuruz
euz bet karet he Jezuz.

Skler walch en deuz-an diskoueet

Ann deiz oa bet merzeriet ;

War dan ar bourrev a drec'he

Ann tan euz karante Doue.

Ann dekved a viz est , enn Rom

Elec'h oa d'ar c'houls-ze o chom ,

Bla daou c'chant eiz hag anter kant ,

D'ann deiz-ze e varvaz ar zant .

Gwall vrezel oa neuze c'hoari :

Valerien , ar mac'her kri ,

En defoa laket enn he benn

Lazan dre-oll ar Gristenien .

Pa roaz urz d'ho frizonian ,

Ar Pap sântel er penn kentan

Da c'hortoz bean Bourreviet ,

Sant Lorans a oa gwall nec'het .

Gwelan re leiz he zaou-lagad
Ha derc'hel da grial : « Ma zad »,
» Ma c'hasset genac'h d'ar maro
» M'ho heulinn beteg enn Envo. »

Ar Pap respontas evelenn :
» Ma map, beet dinec'h agrenn,
» Ar pez hoc'h euz c'hoant a vo groet ;
» Abenn tri devez em heulset ;
» C'hoaz zoken ho merzerinti
» Vo kaeroc'h evit ma hini ;
» Rakkreizho herz oc'h c'houi, mapker,
» Ha d'am noad koz e tinerzer.
» Distroet buan war ho kiz,
» Klasket mat danve ann iliz
» Ha lodennet oll d'ann dut paour,
» Ann ed, ann arc'hant hag ann aour.

Ar zant penn da benn a zentaz,
Ha chetu raktal e teuaz
Unan abeurz Valerien
Hag a laraz d'ar Gristenien :

- « Genac'h chomo ann Aviel ,
- » Ho pern komjo kaer ha santel ,
- » Red vo d'ac'h , vat ! rei ho mado
- » Da Valerien , ma otro .

Sant Loranz laraz evelenn :

- » N'ho po ked ane eunn eskenn :
- » An traou-ze oll zo et d'ober
- » Aluzenno , ma otro ker . »

Ann den-ze a iez droug ennan

Pa glevaz ar c'helou fall-man ,

Ken a laraz garo spontuz :

« Lorans , dinac'het ho Jezuz.

- » Ne n'oc'h ket hep bean klevet
- » Eo bet d'ann oll gourc'hemennet,
- » Gant Valerien , ma otro ,
- » Dont d'ezenzi hon doueo.

Sant Loranz respontaz buan :

- » Otro paour , koll a ret o poan ,
- » Rak me enn bev hag enn maro ,
- » Vo Jezuz hep ken ma Otro .
- » Biken ezenz digenin , vat !
- » N'ho defo ho skeudennko koat ;
- » Me ra goab euz doueo pri ,
- » Dare da gouean war ho fri ;
- » Daoust d'ho c'haerder a ziavez
- » N'ho deuz ked a c'halloudegez ;
- » Ann diaoul hell ho kas oll gantan ,
- » Ha marteze c'houi ar c'hentan .

War ze **teuaz** gand an treitour?

« Lorans , eme an , komizer flour ,

» Traou walch' hœ'h euz laret din me :

» E chominh ket pell en ho ile.

» Prim aman , potred ; c'houeet tan ,

» Eunn tan na zevo ket buan ,

» Eunn tan a boac'ho divalo

» Ma bado hiroc'h lie boanio . »

Sant Lorans eunu tammik goude

Peuc'huz war he c'hrill a lare .

» Ann tu · man , otro , zo poaz mat ,

» Troet egile da boac'hat . »

Goude c'hoaz laraz eveleenn ;

« Tanvaet kig ar Gristenien

» Evit gout , mar keret dibri ,

» Ha gwelloc'h eo poaz evit kri . »

Soufr a reaz enn gwir Gristen
He verzerinti penn da benn
Kalonek mad, hep klemm ebet,
Ken a oa ann oll souezet.

Dre ann toll krenv-se ar Romiz
Oe peur c'honeet d'ann Iiz,
Ho foz doueo diskaret :
Sant Prudanz hen deuz lavaret.

Otro sant Loranz galloudnz,
Teurveet goul digant Jezuz,
Ha digand he vamm ar Werc'hez
Gras ma varvimb er zantelez.

Moulet e Gwengamp, gant TANGUY.



Goudet & Héau

Digitized by srujanika@gmail.com